

94

Rien au fol° 169 recto .

Au fol° 169 verso, ce commencement de note :

Les âmes du purgatoire .  
vers le temp[<sup>s</sup>] de la reforme

(169 verso)

Au fol° 170 recto, seulement le titre :

an ivern

(170 recto)

An Ifern .

(170 verso)

Arzistanc deus an en a choulennan breman  
ha digant r' merc'hez Vari evit gallout Kanan .

Daou den iaouank a wa hag an nos hag an de  
E nen darempredent sur na hep doujanç Doue .

ha na voe Ket an digar a deu do separi  
Ar plac'h a deu da vervel iaouank ha digoursi .

Ar goas men pa neus goelet maro he vestres fidel  
En em tennas d'eux gouent an toës an dud santel .

Eno a pede Doue, hag an nos hag an de  
Evit ma welje he vestres vel pa wa en bue .

ha Satan dre he urs e nen bresant dean  
Dindan Speç eun den bras en en gar dirazan :

— Pegement a rofes dan hini a rafe did goelet  
Goelet da vestrez c'hoas evel pa voa er bed ?

[—] Me zo 'r manac'h iaouank na meus Ket a voien  
Ne meus mert eur flatinen choët en aour melen ,

171 verso)

ha mar gret din en gœlet hep ket nep sort offañ  
me rei anezi dach, o ia, en assurance.

Tapout a ra Krog ennan evel en eur bugel  
Sevel a eure gantan dreist an tie huel.

Arriout rejont neun alle hag a wa hir mewbet  
A gœlet res warben prest dorjou houarnet.

Pa'urias dirag an hor voë dean diorret  
Balamour ma voa gantan an Diaoul inkarnet.

Kasset a voë er belek neuze soudan d'er gamp  
Lech ma voelas e vestres en eur gadeur ardant

Vel eur chriminal bras chadennet eus er rod  
Er c'hoëzen a pizenni nag a war he dioujod.

— Leret din, ma mestrezik, a c'hui soufr Kals a boan  
Raig seblanti ra din e c'hoëh ebarz en tan?

— O ia da, ma servijer, me a souf Kals a boan  
Me zo aman nos de o lestki bars an tan.

172 verso)

[—] Leret din, ma mestrezik, leret din, me o ped,  
Petra er loenet vil se war ho pen Slabeet?

— Serpantet deus an ifern, am Skrapat de a nos,  
Ne meus ket digante eur momet a repos.

— Petra er loenet vil se zo deus ho tiou skouarn  
Hag a Krign ho oll vempio, ho treit hag ho taouarn?

— Re ze e en tousseget en devor nos a de  
Na ne meus ket eur momet a repos digante.

— Leret din ma mestrezik, pera eo a glevan  
evel eur soufflet vras en ho Korf o c'hoëan?

— Er seiz pec'het marvel zo vel ze de a nos  
C'hoëan tan dro d'em c'halon, heb lezel nep repos.

— Petra e er loën vil se e zo en ho c'henou  
A pa nen dioret em spont gant he sellou

— Soud ar c'homsou lubrik zo vel ze de a nos  
A vale em genou hep lezel nep repos.

— Leret din ma mestrezek, hag e e ve moien  
Do tenna a lesse dre gals a binijen?

— Allas! neus ket, ma mignon, na neus moien e bet  
Da sovetat eun inez e veach ve kollet.

[173 verso]

— Leret din, ma mestres Ker, ha c'hui bermetfe din  
Rei da'ch eur pokik c'hoas ken vit nen separi?

— O salokroas, ma mignon, salokroas ney grefet ket  
Rak ma touchfack ouzin en glaou e ve'ch rentet.

— Adi da'ch ta, ma mestres, Kouls e dispartian  
hak ha han do quitat vit biken mar gallan.

— Adi da'ch ma servijer, Kouls e dispartian,  
Gret ma gourhemeno d'ar ger d'am c'hoar henan,

Leret dei e rang bevan voël evit a meus groet  
Leret dei ne vo ket re lib en andret galantet,  
Vit ma malheur eternal me, Siouds, a zo bet.

—

[pas de trad. franç.]